

bremañ

**B
R
E
N
E
L
:
:
Y
O
U
G
O
S
L
A
V
I
A
:
:
L
I
B
E
R
I
A**

An heug hag ar vezh

**4 bajennad ouzhpenn
evit ho Nedeleg !**

miz Kerzu - niverenn 123 - 15 lur

Brezel ha lazhadeg e Kroatia (heul)

E Sarajero ivez e oa bet ur muntr gwechall hag a oa bet kroget d'e heul gwashañ lazhadegoù bet biskoazh en Europa, etre 1914 ha 1918. Diwar diviz ar broioù bet aet ar maout gante ar c'hrogad a-benn diskar evit mat levezon ha galloud Impalaerouriezhioù ar Reter, e oa bet krouet ur stad graet Yougoslavia anezhi (Bro Slaved ar C'hreisteiz), bet aet prim da rouantelezh renet gant Serbiz, gwallvennet da waskañ ar broadoù all, Sloveniz, Kroatiz, Muzulmaned, Ungariz, Albaniz ha Makedoniz.

Dont a reas TITO, Kroat bet savet a-du gant mennozh Yougoslavia drezi hec'h-unan, a-benn da unaniñ dindan bell e strollad, a-drugarez d'un ideologiezh, bet trec'h war an naziegezh, da reiñ lañs, e 1945, d'ur stad federativel, par enni gwirioù an holl bobloù a-fet ar sevenadur hag ar yezh, ha diazezet war ur patrom ekonomikel dioutañ e unan, o reiñ d'an holl bastelloù bro, sañset, an tu da diorren ha da binvidikaat en un doare kempenn : ur skwer vat a veze klasket ober gant Yougoslavia er bloavezhioù '60, ganti un ekonomiezh diazezet mui-pa-vuil war an emrenerezh (autogestion) hag an doujañs da wirioù kulturel ar pep brasañ.

Goude TITO

Marv e oa ar marichal ha war an diskar-hac'h-se buanoc'h-buanac'h stad an ekonomiezh. Ingaliñ a oa d'ober e pep keñver, esaat termenñ petra vije an amzer da dont o deus graet an holl, en dizurzh alies-mat avat, kuit a emglev. E Slovenia, e miz Ebrel 1990 e'ch-se an dud da vouezhiañ er c'hentañ dilennadegoù digor d'an holl gostezennoù. O tiwan e oa an demokratelezh abaoe un dek vloaz bennak avat, gant ar speredoù a cheñch Krenn-ha-krak diwar-benn talvoudegezh Yougoslavia hec'h-unan. Tostoc'h e c'hoantaed bezañ ivez, kasat gant an diorren ekonomikel anat, ouz doare-soñjal ha bevañ a gaver e broioù tro-war-dro Aostria, Italia, Ungaria, ha kumuniezh Europa paneveken. Seul nebeutoc'h a dud a chome tomm o c'halon ouz ur fram-mad hag a skoilhe anezhe war-digarez harpañ broioù paourc'h eus Yougoslavia, chomet war o c'hement all, kouz laret.

Diouz un tu all e vane galloud Beograd etre daouarn komunisted dicheñch a-walc'h o c'hredenn bolitikel,

war-bouez un tamm diboultrennañ graet d'ar benveg-stad, anv ar strollad hag all. Ken reut e chomet war an dibaboù ekonomikel ret ha ken diskredik-all war keflusk ar vuhez demokratel na raent nemet fae warni (manifestadegoù Beograd daou vloaz 'zo a oa bet lazhet daou den en o c'herz).



Gwarded sivil Kroat Dubrovnik och herzel ur repuad a glaske tec'hout dre vor ar gdr taget

E Kroatia, evel e Slovenia, a komprenas ar renerien buan a-walc'h c'hoant penn-rener Serbia, Slobadan Milosevic, deuet e-barzh e 1987, dreist-holl goude an taolioù-narzh er C'hosovo, e-lec'h ma vae lakaet Serbiz o bihan-niver da ren dre waskañ war ur boblañs 90% albaniz enni. Ha goude termiñ un darn eus al lezennoù-stad a c'halle Ungariz Volvodina bevañ eno gwirioù diwarne (Adlakaet e ve anvioù serbek e kornioù-bro enne Ungariz hepken pe dost).

Diskoum Demokratel

War drenkaat e'ch-se ar soubenn etre Sloveniz ha Kroatia diouz un tu hag ar Strollad Serb, ennañ Republik Serbia, Bosnia-Herzegovina, CRNA-GORA. Makedonia a vane c'hoazh etre paouez hag ober an afar, gant an disañval hag all luziet mach'eo an dalch enni c'hoazh.

Ur referendum war an emrenerezh-stad hag an disrann a voe aozet e Slovenia d'ar 26 a viz Kerzu 1990. Aet an trec'h gant c'hoant Sloveniz e pep lec'h. War astenn e'ch-seo kudenn Yougoslavia,

rak un tamm mat a wenneien a vez pourchaset d'ar stad-se gant kumuniezh Europa, ha pouez ar Stadoù Unanet e divizoù ar Bank-Bed n'eo ket unan bihan. Dre skoazell ar broioù paour e oar, evel ma ouzer, broioù pinvidik ar C'huzh-Heol delc'h en anezhe dindan dalc'h war-digarez yac'haat doare oc'h ekonomiezh.

Evel Ar Broioù Balt

Erru eo poent difenn ar gwir a-enep an Nerzh ; lakaat paouez an emgannoù ha mont gant diskoulmoù a skiant vat. Dre du e c'haller mont c'hoazh, ma venner. Lakaat padout ar feulster eno a vije ansav a-wel-kaer petore amzer da dont e vezer en gortoz da reiñ da galz a bobloù all eus Europa.

Nebeut a dra a c'hellomp ober, ni amañ e Breizh, moarvat estreget fuloriñ, kiemm ha nac'h pilpouerezh ar "Realpolitik" hag a dalc'h d'ober he reuz dre ar bed.

Nevez-savet ez eus ur c'homite skoazell Breizh Kroatia Slovenia, gant un dornadig a dud eus Bro-Dreger. Bezañ c'haller mont e darempred gantañ evit skignañ ur sinadeg da vezañ kaset da Brezidant ar Republik, o c'houlenn outañ anavez e-z-ofisiel diouztu Republik Slovenia ha hini Kroatia. Paperenniñ da c'houlenn digant ar c'homite : Komite Skoazell Breizh Slovenia-Kroatia - Gwaz Pren 22300 Plouber.

Joel DONNART

PENNAD-IMOR

Kroatia, an heug, ar vezh

Petra a c'hoarvez e Kroatia ? Pelec'h emañ ar gazetennierien a filme (a bell) brezel Koweit n'eus ket kelt-se ? Hag ar re a gomzomp dimp eus euzh ha heug gouarniañ ar Garded ?

Pe bouez d'an darvoudoù-se, evit ar media gall, e-skoaz marv Yves Montand (mah da repudi bolitikel), mouezh ha koustañs veur a-hervez, pa varv pobl ar Groatid dindan bombez ur Saddam HUSSEIN Europat ? Pelec'h emañ difennierien ar gwir etrevroadel a velle o c'hleier an dezerzh ma cart o warezñ o lounvezhoù breoù ? Sialkomp hon daouarn en enor d'ar bapouez-se, BUSH evel just, ha Fanch MITT d'e heul.

An "dead emellout", evel a lavare egile, ne ya ket betek mont da virout ouzh ul lazhadeg-pobl, pa n'eus netra da c'houniñ. Aotret eo ar gouarniezh hiziv en Europa evel ma oa en amzer an nazied.

Archoazh, skarzhet ar Groatid diouz o bro peuraloubet gant ar Serbed, dre faot lezober ar pennoù-stadoù hag ar bennbolitikaerien a bep liv, e vo, dre Europa, ur bobl repudi nevez, ganto kudennnoù labour, lojan ha debrñ.

War an teil politikel-se e c'halle holl ouarnstourien kement tu dehoù pellañ zo bleuniañ fonnus, evel a vez gwelet en Aostria er mare-mañ.

Pa vo ar vosenn e lec'h all, daoust ha gallout a ray Breizh chom diglafañ ?

M.K.

Evit Euskadi dieub

Tost da 100 000 a dud o devoa kemeret perzh er vanifestadeg aozet gant Herri Batasuna e Bilbo d'an 12 a viz Here, devezh ar "Spagnoliezh". Meur a zek panell a embanne bloavezh dizalc'het stadoù ar bed. Kement kâr ha kêriadenn emañ o c'huzulioù o c'houlenn an dizalc'het evit Euskadi a gerzhe e penn an dibunadeg gant o bannieloù. Deuet e oa un dileuridigezh eus Iparaloe (Harternoz Euskadi), dilennidi en o zouez. Un toullad busoù a chomas sac'het en harzoù gant ar bolis. Al lugan "kurirna bai, espanola ez" (ya

da vanniel ar vro, nann d'an hini spagnol) a voe an hini huchet ar muññ gant ar re a-enep ar bonreizh spagnol, distaollet gant lod brasañ ar bobl.

Meur a zileuriadeg, eus Iwerzhon, Korsika, Latvia, Katalonia, Gwadioup, Ekwador, Kanarizezh, a oa deuet. Bretoned ne oa ket.

En deiz-se, a zo ivez deiz Gwerc'hez ar Pilar, patronez ar Guardia Civil, e oa deuet ar penn-rannarn gall eus Pau da enoriñ ar rannarn spagnol ha da saludiñ he renerien.

A.P.



D'ar yaou 12 a viz Kerzu e vo prosez e Baiona graet da 2 stourmer eus Euskal Herria Euskaraz (gw. Bremañ n°122). Paket war an taol gant an archerien ur penzektaz bennak zo, e rebacher outo bezañ mastaret panelloù-hentañ. An Aotroù Prokolor an devoa goulenet o spañañ ac'hann d'an devezh barn ; sed aze un emzalc'h anavezet mat e kement korn zo dindan bell ar stad-c'hall. Ar barn-enklask, avat, ne gemero ket an diviz-se...

H.B.

Katalonia unanet ! Hemañ e oa ger-stur an 300 a dud o devoa manifestet e Perpinyà d'an Sadorn 7 a viz Du evit kounañ sinadur Emglev ar Pireneoù - e 1859, a oa bet staget gantañ Hanternoz Katalonia ouz ar Stad c'hall.

Bro-Groatia : evel Bro Liban... E-kait ha ma chom difiñv a-grenn pennadurezhioù ar C'henvarc'had eo bet lazhadeg da nebeutañ 5000 kroatid, gloazet meur a zekmilad anezho, ha dilec'het 350 000.

KELAOUENN
Breizh war skramm ar minitel
Festoù-noz, levrnoù, kentelioù-noz, manifestadegoù, abadennoù a bep seurt.
36 - 15 KELA
0 99 87 69 12 - B.P. 2509 - 35059 Roazhon Cedex

Peoc'h er Reter-Nesañ

A-benn warc'hoazh e Jeruzalem

gant Viviana Auffret, eus Jeruzalem

Echu eo bremañ kenbrezegenn Madrid. Kavet e vo da heul testeni ur vreizhadez o chom e Jeruzalem a zispleg penaos e wel-hi ar c'heñverioù-nerzh du-hont hag a ginnig skeudennoù ar vuhez pemdeziek en ur Stad a zo ar brezel o ren enni abaoe m'eo bet ganet.

Abaoe un nebeud devezhioù, emañ an Israëliis hag ar Balestinianed (lakaet a-stroll gant dileuridi Jordania) o prezeg eus ar peoc'h hag eus dazont o broioù. Dalc'het eo an emvod meur-se e Madrid, gant "bennozh" ar Stadoù-Unanet hag hini U.R.S.S.

1 vro, 2 bobl

Peseurt peoc'h 'vo posupl dezho dibab dre ma n'eus nemet ur vro evit div bobl Klask echuiñ gant ar brezel en deus padet tri bloaz ha daou-ugent a zo un darvoud mat.

Marse, emañ ar mare-mañ an hini gwellañ. Diskouezet eo bet gant brezel Irak broioù ar c'hornôg ne vo ket peoc'h ebet biken keit ha ma ne vo ket diskoulmet kudenn-Palestina, da larout eo keit ha ne vo ket roet douar -o bro-ha frammoù politikel d'ar Balestinianed. En tu all, emañ dav reiñ surentez ha kreduo sur da Israel.


Aloubiñ

Krouet o bro ganto ha gant sikour broioù ar c'hornôg warlerc'h an eil brezel-bed, e 1948 - an Israëliis o doa aloubet Sisjordania, Gaza, reter Jeruzalem e 1967 (mui ar Sinai, roet en-dro da Vro-Ejipt war-lerc'h emglev "Camp David").

Staget an douaroù-se ganto ouzh Israel ! Harluet an dud, da lavaret eo kaset kuit dre nerzh. Ar re o deveze c'hoant mont a-enep melestradurezh Israel a veze lakaet en toull-bac'h. Dinamitet a veze o ziez.

War-lerc'h e veze implijet ur ruiher evit mirout ouzh o ferc'henned a zont endro hag evit nac'hañ ar prouennoù. Ne chome ket, d'an Arabed, d'o familhoù, nemet mont ar c'hampoù evit re-zivroet e giz 'vez laret gant ar broadoù unanet, cf = an destenn 242.

Ouzhpenn-se, er vro-mañ, e oa bet faziet an Istor. Alies a-walc'h ne veze taolenn-c'hlad ebet gwechall, na betek n'eus ket pell'zo.



Peseurt dazont evit yaouankizoù Palestina ?

E keradennoù 'zo, e veze implijet ar gwir-boas = al wagf. Neuze e oa bet dibosupl d'an dud prouñ, dre skrid dirak an "dalc'herien", e oa an douar hag ar savadurioù dezho.

Eretz Israel da bal

Evit melestradurezh Israel emañ sklaer an traoù abaoe ar penn kentañ.

"Dav eo dimp kaoz harzoù Eretz Israel kozh en-dro, ha mirout anezho da virviken"; ha larout eo tout ar pezh a zo bet aloubet betek bremañ.

Hag an Arabed ? "Ar re-se, n'o deus nemet mont da Jordania -o bro-" Setu ar pezh 'vez diskleriet ingal gant al likoud a-bezh (gant Aviel SHARON en

e benn dezhañ), ha gant strolladoù all an tu dehoù : ar Tsomet...

Yitshak SHAMIR, ar c'hentañ ministr, penn kentañ dileuridi Israel e Madrid a zo un ezel a-bouez el likoud, ivez.

Abaoe miziu 'zo, da skouer, e vez savet tiez noz ha deiz, e Sisjordania ; e Jeruzalem, e Gilo -etre Jeruzalem ha Bellehem- dija, n'eus nemet 8 km etre an 2 gêr. Se, evit reiñ bod d'an 350 000 dan o tegouezhout eus ar broioù soviedel er bloaz-mañ.

Ha tammig-ha-tammig e vo lakaet ar re nevez erruet d'ober al labour a veze graet gant ar Balestinianed betek bremañ. Ar pezh 'vo un taol start evito. E mod-se, e vo anataet d'ar Stadoù-

Diaes ha hir-tre e vo ...

Unanet, da Europa, d'an holl, n'eo ket prest Israel da reiñ douar Eretz Israel d'ar Balestinianed. Peseurt peoc'h ijinañ, neuze ?

Palestiniz war daeraat

Eus tu an OLP, e teuer da vezañ startoc'h ivez. Lâret e oa bet gant Yaser ARAFAT "Dileuridi Bro-Palestina e Madrid a zo holl izili eus an OLP". Ar pezh n'eo na gwir na faos : Ul lod diout a zo tost-tre outañ ha bochadoù n'emaint ket 'barzh, anezho = an Dr H. ABD AL CHÂFI (penn bras dileuridi Palestina) an It. HACHRAOU, an A. al HUSSAYNI (emañ dav dezhañ chom a-dreñv : eus Jeruzalem emañ !)

Sur ! se ne oa ket evit lakaat J. SHAMIR laouen-bras. Met ne faote ket da Y. ARAFAT, na d'ar Fatah en e bezh chom a drañv ar stoumerrien d'arañ = Ahmad IIBIL (eus an FLP), Nayif HAWATMAH (eus an FDPLP), hag all ...

War an dachenn emañ, emañ 'gozik sioul an aergelc'h. Ingal, hed ha hed, 'vez strolladoù soudarded o kontrolliñ an dud. War a seblant, war zigreskiñ ez a an intifada. Padout a ra ar lourgasmañ abaoe ouzhpenn tri bloaz.

Bemdez e welomp, emañ, kirri-polis o tegouezhout d'ar polisti kreiz (tre-tal an iliz-veur Ortodoks emañ, eh.)

Bemdez e vezont leun gant Balestinianed, yaouank. Staget o daouarn dezho gant tammou fisel a-dreñv o chein. "Bugale" an intifada int.

War-lerc'h e teu o familhoù. Dezho da c'hortoz, neuze, da spiañ e teulo o mibien er-maez, hep dale. Chom a roent e giz-se, dirak ar polisti, e-pad an devezh. Mat, a-wechoù, ne zu ket o bugale er-maez anezho... Estrenien en o bro !

Abaoe penn kentañ an intifada, ez eus bet lazhet 1200 den ar pezh' zo bet lâret din gant Balestinianed. (d'an 30.10.91) ar sifroù-mañ, n'int ket ofisiel ! bugale pe grennarded evit an darn vuiañ diout - gloazet ez eus bet, 2000 den. Bout 'zo > 60 000 den en toull-bac'h. Gamal, da skouer, ur paotr 24 bloaz. Daou vloaz'zo e oa bet torret e livenn gein dezhañ gant soudarded Israel 'evit reiñ un gantel dezhañ".

Abaoe se, emañ dav dezhañ chom azozet-ingal war e gador-ruilh. Abaoe m'emañ digor emvod Madrid, e vez selaouet ar skingomz ingal, gant an dud, da larout eo ha gant Israëliis, ha gant ar Balestinianed. (Arabed kentoc'h dre ma'z eus (abaoe 1948)

Palestinianed a zo Israëliis. Selaouet 'vez ar c'heñver "ispisial" er c'hiri-tan, er stalioù, er burevioù, e pep lec'h. Hirnoz o deus, an holl, gouzout e pelec'h emañ dagouazhet kenbrezegenn Madrid ha da belec'h ez a o broioù.

Goanag... keit ha ma vo komzet.

E giz e weler, ne grog ket ken mat a-se emvod Madrid.


Diaes ha hir-tre 'vo kenveuretaat, a-raok 'vo kavet un emglev bennak evit :

- 1- lakaat Israel da vont kuit eus Sisjordania pegiz gober ?
 - 2- kavout harzoù mat evit pep hini eus an daou du = Israel/Palestina.
 - 3- reiñ un dazont - peseurt hini ? - da Jeruzalem kribenn Stad Israel hiziv, ha kêr santel an tañ relijion ivez.
- Met... keit ha ma vo dalc'het ar genbrezegenn ganto... ■

Beaj Bush da Japon nulet

Freuz a-bep tu

Nulidigezh beaj G.Bush da Japon a laka diaes ar Republikaned e S.U.A., bloaz a-raok an dilennadegoù. Politikerezh estren Ministr Kentañ nevez Japon ivez zo diskaret.



Kiishi Miyazawa.

PUBLIZKUNTZA 91 Foar etrevroadel war ar bruderezh en Euskadi

Ere an 18 ha 22 a viz Kerzu e vo dalc'het e Donostia (San-Sebastian) kentañ foar etrevroadel ar bruderezh e yezhoù "bihan".

Aozet eo ar foar gant Hizgaba e zo kuzul Euskadi Burev Europa ha gant EKB, ar c'hengevreded a vod kevredigezhioù hag embregerezhioù a ra war-dro an euskareg ha sevenadur Euskadi. Digor eo d'an holl embregerezhioù a ra gant ur yezh "vihan" evit o bruderezh pe kinnig o marc'hadourezh.

Titouroù :
Burev Europa : 98.55.76.16
pe Publikuntza 91, Balleneros 12,
tañ A 20011 Donostia
☎ 46.66.76 - Faks : 46.68.94

Abaoe e anvadur eo bet George Bush en 31 vro disheñval evit kretaat un "Urzh Etrebroadel Nevez". "Prezidant tasmani" a vez graet anezhañ gant e genvroer. Taget gant e enebarien a-zivout ar c'hudannoù diabarzh, an deus nulet e vañ da Japon bet raktraset evit miz Kerzu. Setu m'eo bremañ tamallet gant kannidi ha senedourien e gostezenn a vezañ sklav an Demokratad ha disaven e-keñver ar c'heveler enorus. Gwir eo eo diaes an taol da c'houzañ gant Ministr Kentañ nevez Japon : Kiishi MIYAZAWA. Prientet an doa hemañ un deiziadurad emgavioù diplomatik : George BUSH e miz Kerzu, John MAJOR e miz Genver, Hans Dietrich GENSCHER e miz C'hwevrer. Politikerezh ar Ministr Kentañ evit an estrenvroioù a gouazh neuze an e boull : embannet an doa hemañ war ar groaz e oa deuet a-benn da lakaat ar Stadoù-Unanet da zont betek ennañ.

Y.V. THOREI

Emgav ar c'huzulioù sevenadurel Unvaniezh ar ra nerzh

E Montpellier, kêrbenn rannbarzh Languedoc-Roussillon, eo bet dalc'het trede emgav ar rannbarzhioù dezho ur politikerezh e-keñver o sevenadur hag o yezh. Kenderc'hel a ra eta an darempredoù a oa bet skoulmet e Roazhon e miz Mezheven 1990 hag e Tozoa e miz Kerzu 1990. An intrudu bet kemeret gant Kuzul Sevenadurel Breizh bloaz hanter 'zo a zo o tisoc'hañ tamm-ha-tamm war ur c'hel labour gwiñon.

Kreskiñ a ra bapred niver ar rannbarzhioù a gemer perzh bremañ en emgav reoliek diwar-benn ar politikerezh e-keñver ar sevenadurioù pobl : an 21 ha 22 a viz Du e oa deuet da v/Montpelhier dileuridi eus Languedoc-Roussillon, Midi-Pyrénées, Elzas, Korsika, Breizh, hag, evit ar wech kentañ, Provence Alpes Côtes d'Azur.

Evit Breizh e oa Per Denez ha Tangi Louarn en anv Kuzul Sevenadurel Breizh, hag an Aotrou Jarrey, prezidant komision ar sevenadur, en anv ar c'huzul rannbarzh. Deut e oa ivez Yann-Fañch Kemener evit departamant Penn-ar-Bed. Amzer da zont ar c'huzulioù sevenadurel ha politikerezh ar rannbarzhioù e-keñver o sevenadurioù pobl a oa an danvez ar wech-mañ. Divizet ez eus bet klask diazezañ kuzulioù sevenadurel, war skouer Breizh pe Gorsika, e-lec'h ma ne oa ket. Diouzh un tu all, e-lec'h ma n'eus ket kargidi ispisializet war ar yezh hag ar sevenadur pobl, evel e Breizh, e vefe klasket lakaat ar postoù-se da vezañ savet. Gant div ofis-mis eo eo vo kemeret e karg da vat amzer da zont hor sevenadurioù ha yezhoù. Rak, ma 'z eo bet, betek-henn, politikerezh nemetañ ar rannbarzhioù respont da c'houlen ar c'hevredigezhioù, e soñj d'an dileuridi bodet e Montpellier, ez eo poent d'an dilennidi kaout palioù resis er c'hevrev-se.

Rannvroelaat an deskadurezh
An 11vet steuñv a zo o vont da vezañ savet dizale a ranko kemer e karg raktresoù resis evit hor yezhoù ha



Per DENEZ,
Prezidant Kuzul Sevenadurel Breizh

Ivez hini ar yezhoù estren, "ar pezh a zo ur gladenn dic'houzanvus, dreist-holl pa gomzer a-hend-all eus kreskiñ plas ar yezhoù en Europa". Goulenn a reont ouzh ar c'huzulioù rannbarzh reiñ da anaout o enebiezh ouzh mennadoù ministr an Deskadurezh "reiñ a reont da c'houzout ne vefent ket a enep ur rannvroelaat eus an deskadurezh".

Lizher skoazell da zaou brizonlad

Ni, izili Stourm ar Brezhoneg, a sav a-grenn a-enep karc'hardigezh Alun Llwyd ha Branwen Nicholas, daou ezel yaouank eus Cymdeithas yr Iaith Gymraeg, a voe kondaonet gant lez-varn Yr Wyddgrug e Kembre da bep a zaouzek miz toull-bach evit ar perzh o doa kemeret er stourmadeg evit ul lezenn war ar perc'hennañ e Kembre.

Rankout a ra ar gembraergerien, ha dreist-holl ar re yaouank, kuitaat da dreist-holl abalamour da "lezennoù ar marc'had". Setu perak emañ Cymdeithas yr Iaith Gymraeg o stourm evit ul lezenn war ar perc'hennañ, hag e lavar n'emañ ket Kembre da werzhañ.

Embarz a reomp hor skoazell d'an daou brizhonlad ha d'an holl stourmerien evit ar c'hembraeg a vez kaset dirak al lezhoù-barn abalamour d'o oberoù difeuls evit ma chomo bev ar c'humuniezhioù kembraek. Goulenn a reomp groñs digant gouarnamant Breizh-Veur lezel Alun Llwyd ha Branwen Nicholas da vont en e frankiz diouzhtu, ha kregiñ da gaozeal gant Cymdeithas yr Iaith Gymraeg a-benn kavout un diskoum holliek da guidiñnoù al lojañ e Kembre ha d'ar c'hudennoù a sav diwar an enbroadeg saoz e Kembre.

- Lizher kaset da British Embassy e Pariz -



Adlodennañ armerzh Sina : Lod eus an embregerezhioù lec'hiet e Proviñsoù ar Su, er Guangdong dreist-holl, a zo en arvar da goll o emrenerezh a-fet o darempredoù-kenwerzh gant an estrenvroioù. Nach a c'helle gouarnamant Beijing nevez ar gwir-mañ dezho hag e reiñ da embregerezhioù an Norz. Gant Hong-Kong e vez gwelset se evel ur broudiegzh-nerzh a-berzh Beijing a-enep Proviñsoù ar Su, re amren d'he soñj. Embregerezhioù ar Su a ranko en em adlakaat e dalc'h kevredigezhioù enporz-ezporz ar Stad.

Y.V.Thorol

Emgav ar skinwelioù e Kewenn Ar vugale da gentañ

Pennoù bras eus skinwelioù e yezhoù bihan (Euskal Telebista, BBC Skos, 4re chadenn Iwerzhon) o doa respontet da gouviadenn A.BIENVENU, bet rener an abadennoù brezhoneg war FR3, d'an 21 a viz Du, e Kewenn, hag o doa taolennet stad o chadennoù en o broioù.

Ar pouez kreffiv a oa bet lakaet war abadennoù ar vugale gant an holl rennerien a oa deuet : D.O' HELLAITHE evit TV Iwerzhon, I.F.GREGOR evit TV Bro-Skos, M.OLAGIREJUL evit TVEuskadi ; anzavet e vez gant an holl e tremen ar vugale kalz muloc'h a amzer dirak ar post tele eget er skol, ha setu, ma fell d'ur yezh vihan bezañ bezañ klavet war ar skinwel. En Euskadi, evit skoazellañ euskaregier yaouank, o deus kentelioù euskarek dra ret, e vez skignet ur barn abadennoù, pe produet gant ETV, pe doublet gant aktourien eus ar vro. Dre se e teu 80% eus re yaouank ar vro da sellet ouzh ETV bemdez. E Bro-Skos ivez e vez abadennoù evit ar vugale bemdez, abaoe daou vloaz, hag e Iwerzhon e fell d'an dud krouiñ ur chadenn evit ar vugale, rak merzet o doa e oa gouezeleg yezh ar skol hag an darempredoù gant an dud vras, hogen saozneg eo yezh porzh ar skol, hini ar vugale etrezo. Istor o chadennoù o deus kontet pep rener, ha mantras a-walc'h ar gefiveriadenn gant stad ar skinwel e Breizh. E 1920 e oa bet krouet ar chadenn skinngomz gouezeleg kentañ e Bro-Skos, e 1972 e Iwerzhon, e 1950 ar chadenn skinwel e Bro-Skos, e 1972 en Iwerzhon hag e 1983 en Euskadi. Dishfevel pep bro, pep pal, hogen spontus a-walc'h diorroadur pep chadenn : ur wech m'eo krouet ar

chadenn e vez gwelset raktresoù abadennoù o tont, niver an survezhoù skignet o kreskiñ ingal, hag e Bro-Skos evit 50 000 gouezeleg zoken ! Euskal Telebista, harvez un enklask e 1990, en deus lakaet niver an euskaregier da greskiñ eus 1983 da 28% eus ar boblañs eus 1983 da 1990. Ar chadenn skinngomz iwerzhonat a zo bet diskrevet gant D.O'HELLAITHE evel "an outstanding achievement, maybe the only one in Irish policy" (berzh bras, an hini nemetañ marteze e-keñver politikerezh ar yezh). Deuet e oa ivez Henry GOETSCHY, Senedour Elzas, da gomz diwar-benn e raktres-lezenn (47vet raktres diwar "yezhoù rannvroel Bro-C'Hall" en ur ober daou ugent vloaz). Kinnig a ra an Ao. Senedour diskar sistem FR3 ha reiñ an arc'hant hag ar binvioù da "ofisoù skinngomz ha skinwel" e pep bro. Rediet e vefe an ofisoù-se da skignañ an hanter eus o programmoù da nebeutañ e yezh ar vro, ha paeet e vefent gant arc'hant an tailhoù hag arc'hant prevez, daoust dezho chom dindan beli ar c'huzul-rannvro. Ar pep souezhusañ eus komzoù an Ao. Senedour a oa marteze e glevet o venegiñ ne oa ket kalz spi e yafe ar raktres betek bezañ votet zoken, hag o iskritvañ galloud melestradur ar Stad C'Hall hag e varregezh evit enebiñ ouzh ar pezh a zisplegi dezhañ. Mat da glevet eus perzh un dan dilennet !

HEGAREG

Flarep

Dileuridi eus an APEEB a oa aet da gendiviz bloaz o c'hengveredigezh, ar FLAREP. Goude Douarnenez warlene, e Prada e Katalonia edo er bloaz-mañ. O wlozet e oa chomet hep dont tost an holl bolitikerien pedet ganto e c'hourdrouzas an aozerien kinnig danvez kuzulierien er mouezhiadegoù da zont.

Disklaret e vo ivez ne oa ket anavezet ar "pardes" gant ar stad, pa vez graet bravoc'h da yezhoù zo en abeg "da niver ar boutailhadoù guz a drouz d'an noz e broioù zo" hag e oa echu ober gant gerioù evel "yezhoù-rannvro" pa oant "yezhoù-buhez". Klavet e voe Henri GOT, prezidant Skol Veur Perpinyà o lavarout "e oa sur-mat a-bouez ar yezhoù rannvro, met mioc'h en arvar e oa ar galleg hag ar yezhoù latin eget ar c'hatalaneg amañ". Biskoazh !

En Euskadi e vo ar c'hendiviz da vloaz. Yann LESKILDRI.

GWELLOC'H EVIT MANN

Danvez-lezenn DOLLO

Nevez embannet eo an danvez-lezenn niver 2201. Daoust ha gwelst, ha dreist-holl votet, e vo pe ne vo ket gant hom dedupezed a-raok pell ? Deuet eo er-maez ar c'hinnig-lezenn 2201, lesanvet "DOLLO" (depute Sant Brieg) diwar-benn statud ha kas-war-raok ar yezhoù "rannvro" er Frañs. Ne gaver ennañ, evit komz halfval ouzh ar wirionez, nemet kinnigoù a c'hallje bezañ aprobez gant ar muiañ niver. Skarzhet eo bet diouzh an destenn ar pennad oc'h ober anv eus statud ken-ofisiel ar yezhoù "rannvro" a vije gounezet gante dre al lezenn-se. Klasket ez eus bet avat, a-hed ar c'hinnig, pleidiñ gant kement a sell ar vuhez, ar skol hag ar media (artikl 12 ha 13).

Da bep hini bremañ da bouezañ c'hoazh par ma c'hall war e deute evit ma vo lakaet da vat an danvez-lezenn war roll-labour an dalc'h kentañ a vo gant an "Assemblée Nationale" e Pariz. N'eo ket dre lezenn an hini e saveteer yezhoù war vont da get evel just, met un tamm skoazell, pe un tamm plegañ a-berzh Stad zo mat da gaout moarvat.

Joel DONNART

Tibet e Roazhon : "Tibet, arz ha prederouriezh" eo anv an diskouezadeg a c'heller mont da welet e mirdi an Arzoù Kaer e Roazhon betek an 3 a viz C'hwevrer.


MANIFESTADEG VRAS
D'AR SADORN 28 A VIZ KERZU
E KEMPER - ALEOU LOKMARIA - DA 3 EUR
EVIT UR CHADENN SKINWEL BREZHONEK
AOZET GANT STOURM AR BREZHONEG

Lennit
al liamm
Skrivañ da AL LIAMM
16 straed des Fours à Chaux
35400 - SANT MALO -
Koumanant bloaz 150 lur (studierien, tud dilabour 100 lur)

Diviz war ar c'helenn d'an dud deuet

Kas pelloc'h ar gaoz

Diwar ar pennad skrivet gant Mark Kerrain hag an evezhiadennoù graet gant Doming Jolivet e niverenn diwezhañ BREMAÑ e fell din loc'hañ evit kas pelloc'h an dail diwar-benn kelenn brezhoneg d'an dud deuet. A-raok distreiñ war ar c'hinnigoù a zo en eil pennad hag egile e karfen pouezañ war talvoudgezh ar preder a zo da gemer gant ar c'helenn brezhoneg d'an dud deuet; ha pa'z eo va micher ar c'helenn-se end-eeun, ha va stourm ledañ hor yezh er vro ha gounit dezhi un dezvad a yezh kefridiel e Breizh, ez eo koulz din ezteurel un nebeud mennozhioù hag ober un toullad kinnigoù.



Kentel e Kastell La Briantais e-pad un dibenn-sizhun staj

A-bouez eo kelenn brezhoneg d'an dud deuet

Re bell eo chomet an Emsav, ma'z eus un tamm ster gant ar ger-se c'hoazh, ur metoù gant ur mennozh, pe gant ur stourm hepken. Ha pa vezer gant skoliañ hor bugale en hor yezh ne vezer ket gant traoù all, siwazh. Ha kouskoude n'eus ket tu da empennañ un diorren d'hor yezh hep pliedin a-zevri, e-ser ezhommoù all, gant ezhommoù an dud deuet a-fet brezhoneg. Rak gant ar re-mañ eo an hini e vez kasat ar yezh er vro, ha diazezet emzalc'h ar yezh e-kefriver hor yezh hag he dazont. Hag ar re-mañ eo a ranko bezañ pledet gant lakaat o sonjoù da emdreiñ a-du gant ar yezh, war un tu, ha reiñ dezho an tu da vostañ d'o ezhommoù yezh war un tu all.

Ne vo ket tu d'ar brezhoneg kaout ur vuhez kevredigezhel deraet er vro-mañ ma ne vez ket stummet, dindan verr amzer, un niver bastus a vrezhonegerion ampart e pep kerz eus buhez ar gevredigezh, ha pa lavaran brezhonegerion ampart e fell din spisaat re barrek da seveniñ o micher, o c'harg pe o roll en hor yezh. Pa ouzer pegen diaes e vez dija kavout tud varrek a-walc'h da gellenn brezhoneg evit ken nebeut-se a skolidi e vez merzhet pegen pell emaoamp c'hoazh eus un egin a vuhez wirion. Ha n'eo ket en ur bed a gellennerion nematken

emaoamp o c'h hunvreal, neketa? Met a-raok kaout arbennigourion a bep seurt, arzurion, kalvezourion, merourion, micherourion, filmourion, kelennerion h.a... barrek da vevañ e brezhoneg e vo ret labourat start ha buan. Ha neket kontañ war ar vugale a vo o tont eus reizhiad kelenn Diwan: n'eus nemet 8 anezho en trede klas, ha ne vint er vuhez oberiant nemet a-benn un dek vloaz bennak.

Ur ghetto nevez

Ur poent all na c'haller ket mont hebiou dezhañ eo ar c'hefriver etre ar pezh a vez goulnet (groñs?) gant an Emsav, ha stad ar gevredigezh e Breizh. Gounit un dezvad a yezh kefridiel d'ar brezhoneg a dalvez e luy ar yezh da vezañ ret, pe damret, evit derc'hel karg pe garg e Breizh. Mard eo se a vennomp tizhout ez eo arabat deomp tevel war ar c'hevrievoni a ziwante e-touez an nannvrezhonegerion a vefe berzet outo ar c'hargoù-se ha c'hoari o roll en ur Vreizh ma vefe dalc'het 'ar plasoù mat' gant un nomenklatura a vrezhonegerion, n'o defe nemet ar varregezh da vrezhonegiñ da berzh mat. Paneve, evel-just, an tud'an holl da zeskiñ brezhoneg mat gant doareoù efedus ha micherel.

Ur gwir steuñv, ur gwir gadoniezh, a rank bezañ savet evit ar c'helenn brezhoneg d'an dud deuet, e-ser ur gadoniezh ledanoc'h evit diorren

fachenn ar yezh e Breizh. Hag en em vogañ a ray ar steuñv-se diwar tri zra: mennozhioù, tud hag arc'hant.

Stourm pe ... labourat ?

War ar mennozhioù da gentañ e fell din tabutañ rak ne savin ket a-du gant pennad M. KERRAIN war ar poent-se. Ne gav ket din e ranker loc'hañ gant sevel ur gevredigezh nevez; dav eo loc'hañ diwar ar pezh a zo, pegen treut bennak e fadval bezañ. Ar framm kevredigezh kinniget gant M.K. a zo tremen ponner, ha kemer skouer diwar Diwan a zo arvarus, dre ma n'eo ket deuet a-benn Diwan da ziskoulmañ e gudenn framm, dres a-walc'h, dre ma n'eo ket ur skouer a youl kreskiñ ken anat-se, ha dre ma 'n em lech e par ur stourm a-enep d'ur framm all, hini an Deskadurezh-Stad: diaes e ve ijinañ peseurt enebour a c'hallomp kavout evit diazezañ ur framm kelenn d'an dud deuet, nemet disablantied hor c'hevriev. Aon a zo da gaout ivez dirak ar 'vreizh-demokratel' a rene e diabarzh ur seurt kevredigezh, pe kevarzhe, pa lavarin mat, a ve muioc'h ur skolidi d'an efedusted eget ur doug d'al labour, kentoc'h eget d'ar stourm. Ha dres, marteze ez eo amañ an hini emañ an droukvesk war ar mennozhioù diaze: ar c'helenn brezhoneg d'an dud deuet zo diaes d'e vezañ evel "stourm", un obererezh ramzel ne lavarin ket. Klevfet an emsaverion eo

gwelout ar stourm e pep lec'h, pa n'emañ ket da vezañ : kelenn brezhoneg n'eo ket ur stourm, ober skol vrezhoneg d'ar stourm, ober skol vrezhoneg d'ar stourm, ne stourm ket pa gomzan brezhoneg gant va gwreg, va bugale pe gant an dud all. Al labour ramzel a vannegen bremañ a ranko bezañ kaset gant labourerion, tud a vicher ha pa ne vefe nemet ul lodenn vihan eus o amzar, ha n'eo ket gant stourmerion: stourmer on-me ivez, met ul lodenn all eus va buhez eo, a glaskan digejañ diouzh va labour, gant poan a-wezhioù, re henn anzar.

Sevel ur steuñv

Evit distreiñ d'ar stumm a ranko kemer ar steuñv-se, ar gadoniezh-se e kav din e ranker loc'hañ diwar ar pezh a zo : un nebeud kentelioù noz en un nebeud a lec'hioù, sozet gant kevarzheoù disurt, pe zoken gant hiniennoù hepken. Ouzhpenn-se stajoù mareadek e lec'hioù zo, stajoù hañv ha stajoù STUMDI (a zo bat ankouaet, souezhusat tra, gant M.Kerrain). D'an holl intruduù-se e ranker degas un tog, a vo e labour kenurzhiañ, stummañ, kreskiñ.

KENURZHIAÑ

Kenurzhiañ a dalv unvaniñ :
 - ar palioù hag an derezioù kelenn,
 - an dafar kelenn,
 - an euzvezhioù,
 - ar prizioù,
 - gop ar gellennerion,
 - an doareoù da brizañ live ar studierion (lesterioù).

STUMMAÑ

Kouistus e vo ar stummañ, mar fell deomp diazezañ unan a zoare. Ur steuñv a ranko bezañ savet, diazezet war ur reizhiad heñcherion, gant ur programm resis. A-unan e ranko mont ar stummañ ivez gant ar c'hreskiñ.

KRESKIÑ

Diazezet ma vo ar reizhiad kelenn-se war ar pezh a zo, e ranko buan en em ledañ evit bastañ d'an holl ezhommoù zo. Palioù a vo da vezañ termenet.

An tog : STUMDI

A-du e savan gant Doming Jolivet evit lavaraat ez eo gant Stumdi an hini emañ da vezañ sevenañ al labour a dog. Abaoe 1987 ma oa bet savet, hon eus kaset war-raok ul labour ingal war ar c'helenn brezhoneg d'an dud deuet, kenkoulz gant stajoù digor d'an holl, meur a live enno (5 devezh pe dibennoù-sizhun), gant stummadurioù arbennik (damvez-skolaerion Diwan da skouer), ha gant kentelioù-noz (Park Anvrig, Kuzul Meur Penn ar Bed.).

Abaoe pell ez omp kizidik ouzh kudenn ar c'helenn eta. Sammet hon eus ivez an adlafs da EVIT AR BREZHONEG, ar benveg a ra e kement a zhour d'ar studierion pa ne veza ken embannat abaoe ur c'hwec'h vloaz bennak. Hag an holl dud o labourat ganeomp a zo gopret ganeomp. E-kefriver ar merañ hon eus un tamm mat a skiant-prenañ da zegas ivez, rak war un tu ne vez ket meret ur stal evel hon hini hep un tamm barregazh, ha war un tu all hon eus ur rouedad a zarempredoù "politikel" a ro tro deomp da c'houzout an hent evit ar yalc'hadoù. A-fet stummañ kelennerion, emaoamp o kenlabourat er mare-mañ gant Kembraiz war ur raktres a vo, emic'hañ, sikouret gant Kumuniezh Europa, hag a dalvez da sevel ur programm stummañ evit ar gellennerion par d'an hini a vez kaset gant CYD-BWYLLGOR ADDYSG CYMRU.

Ul labour war Vreizh a-bezh

Ret eo gouzout ivez ez eo mennet Stumdi da gas un obererezh war Vreizh a-bezh, hag ar youl vroadel-se a vo un atiz da gas da vat hol labour a gellenn dre ar vro a-bezh. Selu ma kav deomp ez eus peadra da loc'hañ ur gadoniezh evit ar c'helenn brezhoneg d'an dud deuet e Breizh. Mennout a reomp sevel, dindan verr, ur raktres a vo kaset d'an holl gentelioù-noz hag aozadurioù kelenn a anavezomp, deomp holl d'an em vodañ da sevel ar gadoniezh-se, da studiañ stad an traoù, stad an ezhommoù, hag an diskouloù ma a zo da zegas da gement tra.

Ouzhpenn ar gadoniezh-se, sur a-walc'h, e vo dav sevel ur c'harta a dalvez da genunvaniñ an holl greizannoù kelenn end-d'ur nebeud poentoù diaze. Mont buan a rankomp, war un tu, rak emañ an dilennadegoù o tostaat, hag ar c'helenn brezhoneg d'an dud deuet a zleo bezañ war preder ar re a vo war ar renk, ha dreist-holl ar re a vo dilennet; rak ivez, evel ma'm eus lavaret, ne c'hallomp ket daleañ, ken bras an ezhommoù.

Kouskoude e rankomp ivez kemer an amzer da berdirañ ha da ziazezañ ar gweliant doareoù da vont war-raok, rak ur c'hwitadenn war an dachenn-se a c'hall bezañ gwashoc'h c'hoazh eget ar stad a zienez m'emaomp bremañ.

Herve KERRAIN

STUMDI - B.P. 41
 29870 - LANNILIZ
 ☎ 98 04 08 31
 faks 98 04 16 97

GALV

DA GEVREDIGEZHOU AN EMSAV

Diaes eo ar stourm evit ar brezhoneg en Deskadurezh. Ne zeuomp ket a-benn da lakat ar ministrerezh da asant ken vreautaat ganeomp, a-benn kensevel ur politikerezh gwirion evit ar brezhoneg er skolioù. Dreist-holl e chom sac'het stummadur ar vistri-skol.

E miz Genver 1992 e vo kaset da benn ur sizhunvezh stourm, gant harz-labour evit ar wech kentañ. Prientet e vo e Rostrenn, d'ar sadorn 14 a viz Kerzu, e sal ar Gouelioù, da 2 eur hanter g.m.

Ar vodadeg-se a vo digor d'an holl re a fell dezho kas stourm ar brezhoneg war-raok en Deskadurezh ha kemer perzh ennañ. War gresk e ya an dañjer da welout ar brezhoneg gwanaet, ma n'eo ket oreliat ("marjinalizet") muioc'h c'hoazh gant daskeummadur al liseoù prientet gant Jospin.

Bremañ e tieomp sevel a-enep d'ar re zo o toullañ ur bez evit hor yezh. Na laoskomp ket anezhi bezañ reputuet ganto. Bremañ e tieomp enebañ outo ha start, a-raok ma vo re ziwazhat. Deuit da Rostrenn d'ar 14 a viz Kerzu. Kasit deomp ho kinnigoù stourm ma ne c'hellit ket dont. Hag holl asambles digoromp da vat hent an dazont d'ar brezhoneg !

Tugdual KALVEZ
 Prizidant U.G.B.



Raidió na Gaeltachta

Casla Conamara Co na Gaillimhe Telefón 091-72235/72224 Teileics 50815 Facs 091-72351

Raidió na Gaeltachta a voe savet e 1972 evit reiñ ur servij-skingomz klok en iwerzhoneg da dud ar Gouezelva ha d'an iwerzhonegerien e pep lec'h dre ar vu.

Tamm-ha-tamm ez eo aet war greskiñ niver an eurvezhoù gouestlet gant ar skignva d'an treuzkas ha war ledanaat tachenn ar programmoù. Bremañ e kinnig ur rollad a programmoù diarsav eus an eil penn an deiz d'egile.

Pellskignañ a ra en iwerzhoneg hepken eus kreizennoù-darbariñ lec'hiet en tachennoù-Gouezelva pennañ : e Casla, kontelezh Gaillimh (Galway) ; e Baile na nGall, Co. Ciarrai (Kerry) ; e Doire Beag, Co. Dún na nGall (Donegal). Graet e vez ivez skignadennoù reoliek eus kreizennoù all : Caisleán an Bharraigh (Castlebar) Baile Atha Cliath (Dublin) ; Béal Feirste (Belfast) ; Corcaigh (Cork) Luimneach (Limerick), h.a.

Gant ur rannad nevez er skignva e vez kinniget keleier da lec'hel - koulz hag un dezrann eus ar c'heleier ha programmoù a-zivout darvoudoù ar mare.

Liesseurt-mat eo ar programmoù a bellskignomp : en o zouez e vez

dihuedoù didor ; imbouchadennoù ha divizoù ; sport ; atersadoù-anaoudegezh ; programmoù o lennañ d'an deskadurezh ha d'ar relijion. Sonerezh ha kanaouennoù hengounel eo a vez skignet dreist-holl. War-dro 60 den a labour reoliek a-hed ar sizhun er servij met un toulad kenlabourerien a labour evitañ e darn-amzer ivez. Raidió na Gaeltachta n'emañ ket e dalc'h an embannerezh-kenwerzh : an arc'hant pourvezat dezhañ a resev holl digant Raidió Telefis Eireann (R.T.E), dalc'het ma'z eo an aozadur broadel-se da harpañ ar servij-pellskignañ evit ar bobl. Treuzkas a ra Raidió na Gaeltachta war Grenn-wagenn/modulerezh Ampled en tri Gouezelva pennañ ha war talmerezh Uhel-Dreist modulerezh-talm dre ar vro a-bezh.

Selaouerien ar gouezelva zo skignet dre seizh kontelezh : Dún na nGall, Maigh Eo (Mayo), Gaillimh, Ciarrai, Corcaigh, Port Láirge (Waterford), ha Mí (Meath) -war dro 85 000 den zo o vevañ er Gouezelva, Hervez an niveradegoù-pobl diwezhañ ez eus ouzhpenn ur milion a dud gouest da gomz iwerzhoneg er Republik.

Iwerzhon e Douarnenez



15vet Gouel Sinema Douarnenez a voe dalc'het eus an 23 a viz Eost 1992 d'an 30 a viz Eost 1992. Gouestlet e vo da Bobl Iwerzhon, evit ar wech gentañ abaoe 15 vloaz a gouel. Tro e vo d'an dud dizoloñ ur bobl ha n'eo ket anavezet mat atav, daoust d'ar pezh a vez kredet.

Skosiz o tiskouez an hent Stummañ war ar skingas e gouezeleg

Gant Sabhal Mor Ostaig, ur skol vicherel e gouezeleg diazezet war Enez Skye, e Kornoueg Bro Skos, e vez aozet, adal ar bloaz-mañ, ur stummadur bloaz war micherioù ar skingas e gouezeleg. Arabat d'an den ankouaat ez eus raktraset 8 eurvezh abadennoù skinwel sizhuniek e gouezeleg skignet gant teir chadenn, ha kement-se adal ar bloavezh 1992.

Aozet eo bet ar stummadur-se gant Sabhal Mor Ostaig evit klotañ ouz ezhommoù da-zont ijnerezh ar skingas gouezelek, ha tud bet echuet o studioù skol-veur ganto, pe bet o labourat dija war ar skingas eo a vo kavet och heuliañ ar stummadur leunamzer-se.

Div unanenn zo e korf ar stummadur-se, an unanenn ret o plediñ gant ar yezh hec'h usan, talvoudegezh ar skingas evit kumuniezh ar ouezelegerien, ar produiñ, ar merañ, ar c'hiinnig abadennoù ha lezennoù ar skingas (etrevroadel ha breizh-veuriat).

En unanenn an darvoudoù dirat emañ ar stlennata, ar stlennegenterezh er Gaidhealtachd hag e gouezeleg, ar gouezeleg er Gumuniezh Europat, an arzoù hag al lennegezh ouzelek.

Rannet eo ar stummadur gire ar studi e Sabhal Mor Ostaig hag ar prantad a seizh sizhunvezh d'an nebeutañ o labourat gant ur chadenn skinwel, Grampian pe Scottish Television.

Aveet-mat eo Sabhal Mor Ostaig en ardivinkoù disourt evit kas da benn ar stummadur-se, a zivouto war un Destini war ar Skingas e Gouezeleg hag ar Stlennegenterezh.

Setu ar pezh emañ ar Skosiz oc'h embroger evit un 80 000 bennak a ouezelegerien. Skinwel, stummañ ha labour a ya an unan, evit mad an holl. A zo kaeroc'h, prest int da genlabourat gant ar Vretoned evit an ezhommoù a sav hag a savo er vro-mañ. Deomp da gregiñ enni.

Herve KERRAIN

Bep daou viz lennit

AL LANV

59 hent Kerdonoù Vihan 29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur Skoazell adalek 130 lur

Preder

Kealoniezh o vont d'an anaon

Abaoe nebeut 'zo ez eus krog da c'hwezhañ diouz tu ar reter un avel frankiz evit ar bobl ma'c'het, ha me gred eo bet c'hwesaet gant aked ha dud e Breizh ivez, e-touez ar re a grede dezhe e vije bet graet hon stal da vat ha da viken. Ne soñj ket din e vefe kement-se un degouezh lec'hel ; un heuliad darvoudoù a vez kinniget dre amañ evel disoc'h "freuztal ar gomunegezh" ha netra ken.



Ceausescu, Danub ar preder

Amañ koulz hag ahont emañ ar gealoniezh war he zalaroù. Relijion nevez ar poell denel, ganet eus an dispac'h gall a ya war ziskar prim ken-ha-ken gant hec'h huñvreoù meurdeus a drec'h hag a vestroniezh war donkadur ma-b-den. E kement lec'h m'eo bet kaset an huñvreoù-mañ da benn eo kentoc'h un hurlink hag a zo bet baveg gant ar re ma oa bet aozet o gwandivegezh evite.

BERR HA BERR ...

Berr ha Berr ...

Breizh/An Drouizien

E korf pennad Alain GIRARD diwar-benn "Breizh ar ouizieien war O.F. eus ar 7 a viz Du 1991, em eus lennet ur frazenn bennak a gavan dispar : "Un taolennadur evel hennazh a dalvez da dafar istor kerkoulz ha tostaat ouz ar preder ratozhele n'eus hervezh netra da viken hag a sav tamm-ha-tamm andon e anaoudegezh e-unan". "Panave kelenn pe skignañ ar ouiziegezh skiantel-se, a gav da Michel CABARET, ne c'hellfe darvezout araokadur gwirion ebet na sevel c'hoant-gouzout gant den."

J.B

An ampoent n'eo ken da sevel un "urzh nevez", da denañ an den - naren den hogen keodedad - kousto pe gousto diouz radiezh an endro gouennel ha sevenadurel, ha da glask bazañ a-zioc'h da bep tra evel douezh ha n'omp ket.

Ret mat eo ober mell-wazh gant hon endro, gant hon hêrezh dindan boan da vezañ mamm ebet ken hepte.

Achu eo gant an amzerioù ideolegal, ha p'ez eus c'hoazh politikourien o klask saveteiñ atredoù da saveteiñ o flas, pe gant aon rak ar goull.

Achu ivez gant ar frammoù politikel difeiz, an hevelebiezhioù oberiet a oa sañset kas da get holl gemmoù an dud evel ma vefe diforc'hoù un viligadenn ha neket ur binvidigezh.

Ar jakobinegezh a zo ivez ur gealoniezh ha ne gloustrelen ket un gwenneg war he buhez. Gwell a-se. Arabat eo dimp krediñ avekiant na c'hall an traou nemet bezañ gwelloc'h war-lerc'h. Disfiz am bez rak an

dremmweioù spagnn hag asur. A dreg da gese ar sistemoù diazezet war ur mennoz (fall), e c'haller spurmantañ trolienn ar re diazezet war ar ouenn, al liv, pezh a rafan "iskealoniezh" anezhe. E-pad ar bloavezh-mañ hon eus gallet merzhout pegen kreñv eo dihun ar bobl, ha pegen warlerc'hiet eo ar broioù "demokratele" er c'heñver-se, pezh n'eo ket souezhus tamm ebet.

Pebezh pilpouezerezh a zo bet gant emzalc'h Bro C'hall pa vane ur brezel hag e dalvez hepken da zerc'hel un urzh etrevroadel a ra fae ouz ar bobl.

Gwir c'houzañverien ar brezel-se n'eo ket bet Saddam Hussein hag e genoberurien hogen ar Gurdad, ar Balistiniad hag an aodoù saotret. Tro hon eus bet a-walc'h aze da dafva gevier pemdezlek ideologiezh an egzagon.

N'eo ket bet gwelloc'h e-keñver dishualded broù ar reter. Klasket ez eus bet kentoc'h diarten ar pezh a c'hallfe bezañ, gant aon na zeufe an heveladur tra da c'hoarvezout amañ, marteze.

Dimp ni eo, pobloù bihan ar c'hornog, da ginnig start un doare nevez da soñjal an dazont ha d'e gas da wir evit ar c'hantved nesañ.

Gant nerzh an avel a c'hwezhañ war hon tu.

M.D.
Kealoniezh = ideologie
Hevelebezh = identite

The French Dream

Ur pennad bet tennet diwar
Le Canard Enchaîné
eus ar 6 a viz Du 1991

Doar-Meier

War bajenn "yeched" ar c'h'Quotidien de Paris" eus ar 5 a viz Du, eo bet talbennet ur pennad evel-han : "ur jen mat d'an alkolegezh". ar wirionez erfin : "Bep ar mare a-hend-all e vez embannet eo bet dizoloet "jen an alkolegezh", ha kouezhañ 'ra kerkant penn ar c'houder dreist-mell". Mav diwar zourvel, anat.

Ur c'huzul departamant brokus

(MARCELLIN, tad nedeleg an archerien)

25 000 Lur, setu ar sammad bet tost da z-Diwan ar bloaz-mañ gant Kuzul Departamant ar Mor-Bihan. E keit-se emeur o sevel c'hwec'h archedi nevez en departamant. Da skwar hini ar Faoued (e kichen servijoù an Ekipamant emañ, kit da c'houzout perak !); prest vo a-benn Nedeleg.

K.a.D.

KOUMANANTIT BUAN !


150 lur a-raok ar 1añ a viz Genver 1992

Skoazell adalek 200 lur.

BREMAÑ 8, STRAED HOCHÉ - 35000 ROAZHON

Tipologiezh en enor d'an Aotrou Fave

Gant aked em eus lennet lizherig Job an Horro e niverenn Bremañ miz Here.. Ul lavarenn a gavan un tammig skoemp er pezh a ziskleir : "ar re-mañ (an eskibion) o deus graet o soñj skarzhañ kuit ar brezhoneg diouzh an ilizoù..." Ne gav ket din e vefe bet diouzh o ferzh ur raktres emskiantek, un dibab a-ratozh-kaer evit d'ar Vretoned bezañ hefevelekaet da vat. Abaoe an Dispac'h, evel ma ouzer, n'eus ket a Vreizh. Betek an eil Brezel-Bed e c'helle c'hoazh ar brezhoneg talvezout evit an avielañ met gant ar brezel e tiwan kalz a heuliadout skrijus. An eskibien e Breizh n'o deus graet nemet plegañ d'an degouezh nevez hep klask difenn ar sevenadurezh a zlefed bezañ douget bri dezhi evel d'un talvoud speredel ha denel. Dre-se ez eo deuet frammoù an iliz, ha dreist-holl ar skolioù kristen da vezañ rodegou e fedus a-benn endeuñ ar boblañs er "Republik unan ha dizisrannus".



Ur goullenn a-bouez a zo bet stignet gant Job an Naweur met n'eo ket deuet a-benn da zougen ur varnadenn reizh. Penaos neuze 'ta barn an eskibien dre vras... hag ivez an aotrou Fave (arabat ankouat an den santel-mañ ?) Evit se em eus azotet un dipologiezh, rannet maz eus bet ganin ar Vretoned e pevar rummad : an dud veur, ar Vretoned vat, an drubardad hag an inosanted wenvidik. Sellomp ouzhpap hini anezho, an eil war-lerc'h egile.

An Dud Veur

Da laret eo ar re o deus diskouezet an o buhez kement a ijin, a c'halloud-krouñ, a galonegezh, a zalc'husted ma ranker anzav o dreistded hag estlaminñ outi. Soñjal a ran, da gentañ holl, e tud evel Yann-Vari Perrot pe Roparz Hemon. Lusket war-raok gant ur garantez-vo divent, o deus ar re-mañ sammet war o chouk kinegezhioù eus ar pounerañ ha stourmet betek ar

penn evit reñtañ d'o c'henvroiz o gwirioù-diazezh hag o briedgezh. Dall an hini a nac'he outo an dellid-se hag a ziskredfe war o dilestet hag o harozelezh... Nemet lenn a rafe o oberoù diouzh savboent ar Stad mac'hom hag ar Resistanserien c'hall. Hogen se a zo lavarout e c'houlennfed digant gwellañ difennourien ar pobloù gwasket bezañ war un dro difennourien o gwaskerien. Ur wech komprenet ervat pegen drastus eo evit ur bobl bezañ diberc'hennet eus he sevenadur ha bezañ dilamet digant hec'h ene, penaos mont a-c'houdevezh, da reiñ dom d'ar Stadoù fallak a seven seurt diougiezhioù ha muntroù ? Ar re a had an direizh n'hellont ostiti na doujañs na truez. Al lazherien-boblou ne veritont nemet bezañ flastret. Honnezh eo lazenn an Istor. Ha kaer em eus bet sellout an-dro din, n'em eus ket kavet, penn-da-benn d'ar vouli-douar, harozed prest da zont da skozazellañ o flastrierien... estregat an Emsaverien vreizhat a zo aet, n'eus ket pell, da

birc'hirinañ da Sant Marcel war bez ar Resistanserien c'hall - met seurt koulmaged gwenn ne gaver ket nemeur war hon douar a c'hilc'h'al !

Ar Vretoned Vat

Amañ e klenkan an dud a labour evit ar vro en ur stumm bennak. Pe war an dachenn ekonomikel e vefe (krouerien labour e Breizh) pe war an dachenn kevredigezhel (stourmerien sindikadel), politikel ha sevenadurel. A-walc'h eo diskouez un tamm karantez-vro hag un tamm youl war un dachenn-mañ-tachenn eus buhez hor bro evit bezañ dellezek eus an anvad-se. Hogen, evit pezh a c'hentañ evit hon madoberourien. Moarvat ar gwellañ digol bet biskoazh degemeret ganto a-berzh ar Vretoned abaoe m'en doa hon Nevenos karet dic'houzougat meour ar roue gall. Evel

just n'eo ket bet e-unan och ijinat ur skritur nevez ha, gant se, hadañ strafuilh, enebiezh ha kasoni en Emsav Sevenadurel. Gwir eo. Hogen, evel ma lavare ur vignonez din, ne dalv ket ar boan tennañ war an ambulanou. - Un abeg all a zegasin c'hoazh. N'eo ket bet a-walc'h dezhañ krouñ ur skritur nevez ; fellet en deus dezhañ ivez sevel ul labour "skiantel" a-benn stagañ karr hon bro ouz ar c'hwec'hogn benniget, ma n'helle ken an autonomist viliget dihancañ ar speredoù gant o ideologiezh diroll. E oberenn a-bezh a denn, a-bann ar fin, d'ur psalm azotet evit kanañ meuloudi d'an "Nasion" veurdeuzus ha sakr ma tie ar Vretoned wirion hec'h azouliñ e-giz un Doue nevez. En ur ger, savet eo bet e labour yezhonik evit klod hon madoberourien. Goude ar jedoniezh alaman, an arz proleterek, bennozh dezhañ, hon eus bet an d'toponimezh c'hall. Ar chaloni Fall-Hun, Lysenko an anvioù-lec'h. Va c'hredit ; ma vefe bet un Dante Alighieri achanon - siwazh n'em eus ket resevel zoken a-berzh an Aotrou Doue un dekadenn eus donezonoù lennegel Francis Favereau pe Erwan Evnou - hennezh am dije karet e voutañ e puñs an Ifern evit meur a beurbadelezh. Ha gentañ em dije lakaet da darnjal skeudoù lieslivañ ha liesdoare an holl re o deus e zibabet da bennrener.

An Inosanted Wenvidik
Amañ e lakaan an darn viliñ eus ar Vretoned reuzeudik, dibourc'het eus o c'hultur, torret dezho o menerezh da adsevel o bro n'ouzont ket zoken ez eus anezhi ha c'hoant ebet ganto da legadiñ d'o gouvirien teñzorioù kaer o sevenadur. Mat. Echu ganin va zipologiezh, ez eus tu marteze da reiñ ur respont d'ar goullennoù am boa stignet er penn kentañ.

Goullenn er Sened

Gant Edouard Lejeune, Senedour Penn ar Bed, ez eus bet goullennet ouzhpap Ministr an Deskadurezh petra amañ o vont d'ober evit echuilh gant an diaezamantoù a vez graet d'ar brezhoneg er skolioù, ar re a zo bet kaoz d'ar harzoù-debriñ e Gwened hag e Naoned hevlene, ar re a vir ouzhpap stummadur ar vistri-skol hag ouzhpap digoradur klasoù divyezhek evel Gwidel pe ouzhpap digoradur skolioù

- Pelec'h lec'hiañ an eskibien dra vras ? Er pevare rummad evel just. Parak se ? A-walc'h eo din degemer ar pezh a skrive Job an Naweur e dibenn e lizher : "Evel evit kalz a Vretoned n'eo sevenadur Breizh evito nemet un aspadenn didalvoud..." Ne grad ket din e vo lakaet e gwel, deiz pe zeiz, gant an istorourien ur c'havall bennak bet itriket gant an eskibien a-enep d'hor bro. Ne gradan ket o dije bet mennadout fallak. Hogen dizek penn da benn war ent ergorel, lakizian ha maveilan ar Stad. Enno e soñje Jezus-Krist, sur an pa lavare diwar lein ar groaz, a-raok laoskel e huanadenn ziwec'hañ "Nouzont ket petra reont". Hag an Aotrou Fave pelec'h e lakaat ? Evit gwir, templet e velen d'e lakaat er rummad 3. Na pa vefe evlaket nemet en abeg d'an d'rempredoù a vignoniezh en deus skoulet a-hed e vuhez gant ar chaloni. Ranngaloniñ a ranker o tispartiañ ar re a vez bet unanet ken den ha lusket o c'halon gant an havelep talvoudoù. Ha, war ar marc'had, e kavien mantras lakaat un dan speredet ken kaer e-mesk ar gorkerien veizel. Padal, war-lerc'h bezañ lennet e zisklariadenn ziwec'hañ e rankan o diforc'hañ, pegen glac'haret bennak maz' em gavan. Setu 'ta, spi am eus, ez eo bet diskoulet ar gudenn ganin. Bremañ, mar fell da dud : zo implijout va maizadourioù, ne viran ket a wiritioù strizh. Lakaet e venne unan bennak ober e vad anezho, n'en deus nemet en em embregañ war niverenn ziwec'hañ "Bremañ". Pelec'h, da skouer, lec'hiañ Fanch Broudig, Alan Bienvennu pe c'hoazh Dollo, Tremel hag all ?

Yann ar ROUZ

Ur vro o wadañ a flistradoù Brezel Bro Liberia



Ur bugel 12 vloaz harzet goude stourmadeg e vandannad bugale-soudard

Ur brezel a zo o rivinañ ur stad vihan eus Afrika, Bro Liberia. Unan ouzhpenn en ur rannved n'eo mui evit ar gwalennoù a gouezh dibaouez warni, en ur rannved o soliñ donoc'h donañ en un enkadenn a seblant diremed.

The love of liberty brought us here (degaset e voemp amañ gant karantez ar frankiz) Setu frazenn-arouez Bro Liberia, republik koshañ, ur stad lec'h n'eus nemet ar berzhenned lojeiz du o c'hroc'hen hag a zo ganto ar gwir da volin ur vro a zo deut da vezañ un ifern evit he c'hemeioù, gant ar c'hruz mar deo ar brezel diabarzh a zo ouzhe he rivinañ, ur vro n'eo ket necht pennoù bras ar bed gant he dazont pa n'eus ket enni pinvidigezhioù e-tal da gouezhañ etre krabanou n'eus forzh piv evit hadañ nechtamantou en o c'hreizon.

O vezañ ez eus bet lakaet termen d'ar stourm etre ar soviedourien hag ar gomgourien evit astenn o beli war peurrest ar blanedenn, e kresk an diseblanted e-keñver lodennoù bras eus an trede bed, e-keñver ar re didalvez o fouez ekonomikel a zo aet da netra o zalvoudegezh strategel. Ar reuz a zo e Bro Liberia hiziv, ar gasoni etre ar c'hemeioù a ya d'he stummañ a zo o orin e krouidigezh ar republik e 1847. Savet e oa bet ar stad-se diwar intrudu Washington a glaske ur minic'h evit ar sklaved dichadennet pa oa an amerikaned o kredin dezhe ne c'helle ket ar re wenn hag ar re zo bevañ dieub en hevelep keoded. Fiziet e voe e trevadennerien Bro Liberia ar garg da zegas an aviel war douar o hendadoù, da lakaat termen da kenwerzh ar sklaved ha da stourm a-enep ar dienez. Ne voant ket pell o stummañ ur renkad ar vro ma oant bet dilestret, ur renkad distok a ya d'ober 10% eus he foblañs, ur renkad och astonn feuls e velli politikel hag ekonomikel war ar c'hemeioù all. A-enep d'ar vail-se eo e klaskas Samuel KANYON DOE stourm pa oa eus ur meuriad henroidi, ar mauriad Krahn, war-lerc'h digadoriañ ar prezidant Tolbert. Buan ez eas an traoù da fall hag eneberien ar renad nevez da reiñ lañs d'ar brezel diabarzh, ur brezel didruze gant nousep lazhadegoù n'eo ket deut ar soudarded degaset gant stadoù an tolead, a-benn da grennañ. Toullgofet eo bet DOE ha n'eo ket bet klenket an armoù evit-se.

Lod zonennoù eus an douar n'eus mui an distañ lezenn enno. Toleadoù dianav nevez a zo och en em stummañ evel Bro Liberia, bro Soudan, Bro Peru hag all... Dre tarzhelloù ramparzhioù un hanternoz deut klet e c'heller spurmantañ o bevennoù o wadañ puilh. Ne greder mui o zreuziñ pa gas an holl hentoù pelloc'h d'ar marv. E kalon ar gasoni verv n'eo ket tu d'ar gelaouennerien da zastum boued from evel m'o doa graet e Bagdad evit arvesterien ar zonennoù sevenaet. Un urzh nevez a zo o tiwanañ ar bed sañset. Red eo kompren ar zonennoù deraet o fouez ekonomikel rak takadoù all evel Bro Liberia a zo da vezañ lezet e gouezeri.

Paol ar MEUR

Statistikou

Evit an eil bloavezh eo bet dalc'het K.E.A.V. e Skol Joliot-Curie, prestez dimp gant an ti-kêr. C'hwèzek bloaz bennak 'zo e vez dalc'het Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerien e Skaer, met skol brevez Sant Alan ne oa ket kompenn a-walc'h evit degemer ur c'hampad a dud evel hon hini.

Hevlene ez eus bet nebutoc'h a berzhidi er c'hamp, dre na oa bet degaset staljad ebet gant Diwan. Memestra ez eus bet 58 a dud er sizhunvezh gentañ, ha 63 en eil. O vezañ ma oa chomet an tri c'hamp eus an dud evit an div sizhunvezh ez eo bet tremenet 84 den disheñvel er c'hamp. Pemp rummad kentelioù a oa er bloaz-mañ, unan nebutoc'h eget warlene. Se 'zo kaoz e oa re a zaskarded er rummadoù 3 ha 4. Graet em eus stadegoù war ar c'hamp. Darn anezho a zo arouezius a-walc'h :

- Oad keitat : 33 bloaz, ar merc'hed e 33 bloaz, ar reoù ar 32 bloaz.
 - Breizh uhel 24%
 - Breizh izel 41%
- Notomp evit Breizh izel niver izel Gwenediz : 3 den er sizhunvezh gentañ, 3 ivez en eil. Perak se ? Niver an "estrenien" (o tont a zivaez Breizh)

- eus Kembre : 8 (studierien Rita Williams dreist-holl, eus skol-veur Aberystwyth).
 - Iwerzhon : 1
 - Bro-Japan : 1
 - Kanada : 10
- Hervez ar reizh : paotred : 52%
merched : 48%

- Hervez o micher
- tud gopred : 45%
 - tud hep gopre war o leve : 55%
- E-touez an dud gopred :
- labourerien-douar : 0%
 - eil gennad : 12%
 - trede gennad : 33%

Kemant-se ne glot ket evel-just gant dasparzhadur ar boblañs-labour e Breizh. Ur striv a vele d'ober war-du ar gouerien hag ar vicherourien. A-hend-all ne vo ket "poblek" an emsav sevenadural. Chom a raio betek re un emsav evit tud a renk etre. Met penaos ober evit dedennañ kouerien ha micherourien ?

Dregantad uhel an dud dic'hopr a zo ur guedenn ivez : studierien ha skolidi ez int dreist-holl : 39,5% eus ar c'hampad en eil sizhunvezh. Un abeg ouzhpenn evit goulenn yalc'hadoù arc'hant digant ar servijou ofisiel (kuzulioù-meur peurgetket).

Yann TALBOT

"Saezon"

Bep bloaz bremañ, abaoe 6 vloaz'zo, e teu izelvroiz yaouank d'hor bro da labourat etre miz Gwengolo ha miz Du. Gwellet e vezont o vont dra-holl en arvor Bro-Dreger gant gwetunioù kozh ha kirri-stilej bilhan. Daou-ha-daou e vezont ha mont a reont a-di-da-di da d'roc'hañ ha da gutuilh pennoù hortensia macrophylla sech.

Ur strollad, kreizennet e Landreger, en deus dibabet evelse tost da 8 tonnellad bleuiv warlene.

O labour

Petra eo o labour ?
Penaos e labouront ?
A-hed an deiz e vezont o tastum pennoù hortensia, adalek 9 eur da greisteiz hag adalek 2 eur da Beur-9eur noz, ha se 6 devezh ar sizhun.

Pa vez erru 6 eur noz e tistroont d'ar menaj bet feurmet ganto e Kervarria-Jular, leizh o c'harr a vleuiv arsech. Eno o devezus aozal ur c'htraou da boursechañ ar pennoù bleuiv-kaouled, lakaet ganto un ardivink da c'hwèzhañ avel domm war ar bleuiv. Adwelet e vez ar re sech'h hini ha hini d'o c'hampenn, renket mat e boastou-kartoñs ha lakaet diouzhtu e-barzh ar c'harr-stlej bras preuz da vezañ kaset d'o bro dre gamion.

Servijout a ra ar pennoù bleuiv-kaouled da vokedourien ha da werzherien-vleuiv Holland e-lec'h ma vezont peurgempennet.

Piv a ra al labour kutuilh amañ e Dreger ?

Tud yaouank, darn anezho studierien, darn all reoù hag o deus micherioù all. Ar re am eus komzet ganto a oa kilvizien, blenierien girti-boutin, kelaouennerien, hag all, deut da ober ar "saezon" amañ kamant ha klokaat o gonidigezh hag int damzilaour.

Pilius o kavont ar Vretoned ha degemerus zoken. "Paetoz, mez bannec'hoù dimp alies ! 'mezo, met 'ne gompronnomp ket perak n'eo ket ar Vretoned o-unan a ra al labour-mañ. Daoust ha didalvez eo ar Vretoned ?" "Nann, eveljust n'omp ket didalvez !", a respontis dezho, "met gwir eo n'hor bez ket kalz a intrudu", na c'hoant klask hag ijinañ produioù nevez da werzhañ en diavaez-bro. Ha kouiskoude e vo ret dimp lakaat en hon pennoù ne vimp ket holl implijidi-stad, ha gouvezout mat a reomp hon bezo ezhomm eus tud da vont war-raok. Un dra all a zo sur ivez, sklaer hag anat zoken, eo penaos al labour ne raimp ket a vezo graet gant tud all... ur wech c'hoazh o lakaat hon bro da baourat.

Gireg KONAN

An Dalc'h Mad

E keit ma vez devet bigi pesketa a-hed an aoc'hou e Breizh, abalamour d'ur steuñv anvet "plan Mellick" (lijnet eo bet ar raktras-se e Brusel evit digreskiñ niver ar bagoù pesketa en Europa), e weler fardañ bagoù koad e meur a gêr, peurluian e kreiz-kêr.

War-lerc'h gouel ar bigi e Douarnenez e 1988 e voe krouet gant ar "Chasse Marée" ur gennivadeg anvet "Bigi aoc'hou Bro-Chall" hag ar c'hlañved sevel bigi da redek er vro, eus Pont-Aven da Logivi. N'eo ket tremenet e-biou da Landerne hep ober e reuz enni. Azo, amañ ar chanter e-kichen ar stêr Elorn war ar c'haoc'h e-tal ar sal "le Family". Ar c'hein a zo bet lakaet d'an 12 a viz Gouere. Abaoe, al labour ar dalh Mad a ya war-raok war e bouezig, echu eo da staliañ ar menproù, amaint o vourzhañ ar vag. Emichañs e vo prest e koulz rak an deiz evit morañ ar vag a zo bet dibabet, d'an 18 a viz Ebrel 1992, en abeg d'ar reverzhi vras a vo. Leun a zour a vo e porzh kozh Landerne ; gant-se e vo tu da dud kalonik bountañ warni evit ma riklle betek ar mor. Adalek neuze ne chomo ken gant ar skipailh chanter-bigi deuet eus Sant-Gwenoled nemet da gempenn an diabarzh, da wernian ha da staliañ ar bomm, ar c'horn, ar vag-warn hag ar c'herdin evit ma chomie pep tra en e blas.

Fardet e vo an Dalh Mad diwar skouer ar "Sainte Anne", ur vag kozh fardet e 1946 gant ar chanter-bigi Jacq eus an Ospital. Ur sloup, doare ur gobar ganti eo, dibabet, abalamour d'he ferzhioù mat da loveal. Gwelloc'h eo d'ur vag dre liez bezañ gouest da c'hoari mont ha dont evit pakañ pelloc'h pa vez an avel a-benn dezhi Daou dra disheñvel a ra e Santez-Anna, pesketa ar c'hrejin Sant Jakez pa voe aotreet ar peskerezh e Lannvor Brest pe degas traeh eus ar Minou da Landerne pe da lec'h all. E 1965 e voe dizarmet ar vag ha kaset da vreinañ er Roz e parrez Logona. Hirie, amañ ar Santez-Anna e Douarnenez war ar porzh-ru, stlejet du-hont evit mirdi ar bigi kozh. 17 metrad a hirder gant he adwern, 4,65 metrad a ledander, 7 tonnell warn-ugent a laj enni, un tamm brav a vag e vo an Dalh Mad.

Gouest e vo skipailh ar vag da zispakañ 127 metrad karrez a liez didan amzar gaer, na kaerañ tra ! Kit da welaout anezhi, n'ho po ket a geuz, kamant a ampartiz a zo gant ar c'hilvizien, tud a vicher me lavar deoc'h.

Pol-Yvon

Bep miz e vo kinniget deoc'h ober anaoudegezh gant ur greizenn sevenadurel breizhek ha komzet diwar-benn hec'h oberiantizoù liesseurt. Da heul Oaled Abherve Sant Brieg, vo ur pennad-kaoz gant rener Ti ar Brezhoneg Pariz, e miz Genver, hag ur pennadig e miz C'Hwevrer diwar-benn mont-en-dro Kreizenn Sevenadurel Breizhat Sant-Malo.

Oaled Abherve

Tregont bloavezh evit sevenadur Breizh

Oaled Abherve he deus kroget gant ur bloavezh all. Ur bloavezh pouezus. Tregont bloaz o labourat war an dachenn sevenadurel, n'eo ket un dra dister. Met nebeutoc'h-nebeutañ a dud a zeu d'ar c'hentelioù noz.



Izili Burev Oaled Abherve e 1991. Mikael KORLE (prezidant an Oaled) e penn an daol

Anavezet eo Oaled Abherve evit he c'hentelioù noz hag he frezezennoù war buhez ar vro. Abadennoù sonerezh war graet ivez. Abaoe daou vloaz, an niver a dud a zeu d'ar c'hentelioù noz a zigresk. Marteze e giz e pep lec'h... met e Sant-Brieg emañ ar skol Diwan he deus an niver brasañ a vugale d'ar skol. Siwazh, ur bern tud o deus dibabet komz gallek ganto. Marteze ne c'hellfent ket deskiñ yezh ar vro. Ur gudenn, neketa ? Spi en deus Mikael KORLE, prezidant ar greizenn, gwelout ouzhpenn tregont den mont d'ar c'hentelioù. Emañ an Oaled o klask tud yaouank ivez evit ober war-dro ar c'hentelioù hag ar gevredigezh. Evidomp, ar gudenn gentañ eo ar sal. Ar gêr he deus lakaet ar sal da werzhañ. E-giz-se e c'hellomp bezañ

dioljet an deiz pe un all. Ar stad-mañ a zo spontus dreist-holl evit an abadennoù sonerezh, a zispleg Mikael. War dachenn ar yezh emañ ar greizenn sevenadurel. Setu perak eo bet divizet ganti ober traoù e keñvar ar radio, E Sant-Brieg e vez diaes klevet abadennoù RBO. "Warlene hon doa kaset ul lizher da Goad SAUNIER, maer Sant-Brieg. Goulennet e oa bet klevet gwelloc'h an abadennoù brezhonek war RBO-RBI e-giz ma vez skrivet barzh kaier ar c'hargoù (cahier des charges)". Goude ur bloavezh, cheñchamant ebet evit ar vrezhonegerien emañ. Oaled Abherve he deus divizet neuze sevel ur emvod foran digor d'ar strolladoù politikel ha sevenadurel breizhek, d'ar gêr ha da gentañ penn Yves DOLLO, en e godell e raktres

lezenn war "yezhoù bihan Bro-Frañs". Ur raktres all just arak ar votadegoù. Emañ an Oaled e framm Skol An Arvor, renet gant Jéf FULUP a ra stajoù war ar brezhoneg ar Chapel-Nevez meur a wech e-pad ar bloaz. A du emañ an Oaled gant kinnig kreizenn Roparz Hamon evit ma vefe un den e karg ar brezhoneg evel (Yann Fañch KEMENER e Penn-ar-Bed.) E labour vefe kas war raok ar yezh er vuhez foran, dreist-holl evit lakaat programoù radio ha tele en o sav.

Noël LAINE

Chomlec'h ha titour : Oaled Abherve 9, straed J.J. Rousseau 22000 Sant-Brieg ☎ 96.94.15.54.

Kazetennoù

Meur a gazetenn nevez zo en em gavet gant bremañ : A Messagera : ur c'hannadig o tont er-maez bep tri miz evit harpañ ar servij telematikel nevez krouet e Korsika ez eo. Kaleier a bep seurt a gaver ennañ : levrioù nevez, natur, istor, armerzh... A Messagera 20240 Ventiseri. Pelg. 95.57.32.32. Minitel : 36.15 kod corsi. Kanevedenn "le journal des Bretons de l'extérieur" - Ul liamm etre Bretoned diroet ar bed holl. Kazetenn O.B.E.B.P. 1191, 97184 Pointe à Pitre Cedex - Guadeloupe. kourmant : 80 lur. Ar Bobl "Bulletin d'expression culturelle bretonne du Pôher". Kazetenn vizek o reñk kaleier diwar-benn buhez sevenadurel korn-vro Karaez. 20 000 skwerenn lennet ! Ar Bobl, Kreizenn Sevenadurel breizhek, 2 straed an Tour d'Auvergne, 29270 Karaez.

Levrioù

Aktoù ar c'hendiviz a oa bet azolet e Douarnenez gant an APEEB hag ar FLAREP diwar-benn ar "yezhoù rannvro" zo daoust er-maez. Kavout a reer el levr a 116 pajenn ul lodenn vat eus ar prezezennoù a oa bet graet da neuze. Estremien ha Bretoned o devoa kemeret perzh er c'hendiviz ha reñk a reont deomp pennadoù ledennus e meur a gevler.

A.P.E.E.B. B.P. 2507 35025 Roazhon cedex.

Profoù evit Nedeleg

Nevez deut er-maez : "Ar 1000 ger kentañ", embannet c'hoazh e Gouezeleg, Kembraeg, Euskareg, Alamanezh ha... a vo kavet bremañ e Brezhoneg.

Ur benveg labour dispar eo evit ar skolaerien hag ar gelennerien a fell dezho lakaat un tamm buhez e-pad ar c'hentelioù. Skouennoù farsus e liv gant taolennoù ar vuhez bermed (ment 30 x 23). Ur gentaoueg 1900 ger (tridigezh e galleg) a vo kavet e dibenn al levrenn - gant o skritur fonetek etrevraed.

An droidigezh hag an treuzskriñv e fonetek, ar skridoù displegañ ha kinnig a zo bet graet gant Lukian Kergoat Rener ar Geverenn Gallek ha kalenner e Skol-Veur Breizh-Uhel.

90 lur an tamm + 15% mizou-kas - 30 % distal adalek 5 skouerenn gourc'hemennet.

Skrivañ da : Embannadurioù Skol An Emsav 8, Straed Hoche - 35000 Roazhon ☎ 99-38-75-83.

Ne zisroñket ket Deizlataer 1992 (+ karnedig chomlec'hioù ha pelgomz) - 40 lur an tamm + 15 % mizou-kas - SAE 8, straed Hoche 35000 Roazhon.

da lenn pe da brofañ

"Gourbannoù Sant Eosten, levrenn 1" : Un darvoud "pouezus en istor adsavidigezh ar brezhoneg lennek" eme Youenn OLIER en e gentiskid. Un oberenn toet war-eeun eus al latin klasek. troet pizh-kenañ gant Jil Ewan, lec'h ma kont Sant Eosten e vuhez gant e helavarded dreist-par. 268 p. 85 lur, e ti Imbourc'h leurgêr ar Marchiz 56230 Kistrebzh. "Un Erdennig gant Mikael an Noblez" : Speredalezh Mikael an Noblez. Tad misionoù Breizh ar XVIIvet kantved, lakaet en ur c'haerig evit magañ ar bedenn, savet gant Person Plounour-Menez (29410). 10 lur an tamm. "Ar Rozeza" - Petra eo ar Rozeza, ar pemzek mister gant ar pedennoù diaez. Skouennet brav, divyezhek. 3 lur an tamm e ti Breuriez Sant Ildud, bourk, 56310 Kistrid.

Embannadurioù An Here

5 levr nevez a vo embannet gant An Here e-raok fin ar bloaz :

Dastumad TINTIN : Ar skouarn dorr

- Dastumad SKOL AL LOUARN : ** Mab-kaer ar Roue ** Gwrac'h he ribot ** Paotr e skourvez lér ** Bag ar frankiz

Da vezañ embannet ivez e penn-kentañ miz Kerzu ur c'hatolog bihan (roll-levrioù, prizioù nevez ha prizioù ispisial evit ur brenadenn vras...). M'ho pefe c'hoant da gaout 1 skouerenn anezhañ, pelgomz pe skrivit da sekretourva An Here (98-28-10-37 - Kergleuz 29480 Ar Releg Kerhuon). A-hend-all, arabat disoc'jal e vo kresket priz rakpremaer "Gerdarud Brezhoneg an Here" (440 lur e-lec'h 400 lur) adal ar 1.1.92. Bezit soñj da rakpremañ a-raok fin ar bloaz !


Kartennoù bloavezh mat

Kartennoù bloavezh mat e brezhoneg a zo bet embannet gant Kuzul Skoazell Skol Diwan Sant-Nazer (digor eo ar skol abaoe miz Gwengolo).

Ar priz (dre lizher) a zo : 5 lur evit ur gartenn, 20 lur evit 5 kartenn ha 50 lur evit 15 kartenn.

Evit kaout anezho kasit ho chekenn (+ 2,50 lur evit ar mizou-post) da :

Kuzul Skoazell Diwan Sant-Nazer Kêrnonan 44350 GWERRANN



War dro 400 mignon eus DIWAN e BRO NAONED o deus rasevet e miz Here ur gartenn evel houmañ. Displeget eo e-barzh e fell da Skol Diwan Naoned ha d'ar C'huzul Skoazell EVIT DIWAN dastum archant - en tu all d'ar pezh vez dastumet dija a-hed ar bloaz, en doare "ordinal" - evit prenañ binvioù kompederezh ha bezañ efedusoc'h evel-se da verañ an arc'hant ar skol, da verañ fichennsaozigoù mignoned niverus ar skol, da glasañ anezho, da sevel taolioù a bep seurt, hag all... Ar pal a zo dastum war-dro 25 000 Lur a-raok dibenn 1991. Kroget mat eo an traou dre m'eo deus un 30 bernmak a brotourienn roet tost da 12 000 Lur dindan 4 sizhunvezh ! Lennerien BREMAN o defe c'hoant da gemer perzh a c'hell kas ho prof da :

EVIT DIWAN "Ur C'hompoder Evit Diwan" 3 straed Harcoue 44000 NAONED

Profoù a-zaore

c'hoarioù kaer evit an holl ! goulnenn katalog "Gwerzh dre lizher" Kelt Vimp Bev - 29250 - Laz

Dudi baby-sitting

Ouzhpenn an teir c'hreizen a ya en dro e Roazhon, Sant Brieg ha Lannuon, hag ouzhpenn ar c'hentelioù gitar ha telenn, e kinnig Dudi ur servij baby-sitting e brezhoneg.

Ul liamm eo Dudi etre kerent ar vugale hag ar vrezhonegerien plijet d'ober war-dro o bugale e brezhoneg pa na vezont ket er gêr. Goulenn a ra Dudi un emezeladur (50 lur) gant ar re a vez liammet. An emezeladur-se na vez paeet nemet ur wech an dud liammet. Ur wech emezeladur e chell an dud implij servijioù Dudi baby-sitting a-hed ar bloaz.


An holl re a zo dedennet gant Dudi baby-sitting a c'hell mont e darempred ganeomp.

Kinnig labour

Klask a ra Dudi brezhonegerien yaouank o deus ar BAFA (diplom animatour) pe ar BAFD (diplom rener) e-kor-bro Kemper evit ober war-dro bugale e brezhoneg bep sizhun.

DUDI, 8 str Hoche, 35000 Roazhon, ☎ 99 87 69 11

SKOLAJ DIWAN ROPARZ HEMON Gwener 10 a viz Genver



Pascale Chevillard, Renerez, Youn Bodenneg, Prezidant ar C'huzul Merañ, André Lavanant, Prezidant Diwan, a zo laouen o kemenn deoc'h e vo dalc'het digoradur ofisiel Skolaj Diwan Roparz Hemon d'ar Gwener 10 a viz Genver 1992, etre 4eur ha 6eur goude lein hag un Devezh Doriou Digor d'ar Sadorn 11 a viz Genver 1992. ☎ 98 30 56 83

Festoù-noz

Fest-Notz e Roazhon

Gant ar Strollad Strobinnell Diriaou **19 a viz Kerzu** da 21 eur Campus Beaulieu Roazhon, aozet gant Skoazell Diwan ha studierien Roazhon-Beaulieu.

Fest-Deiz e Gwengamp

Ur Fest-Deiz a vo d'an **29 a viz Kerzu** 1991 er Greizenn Sevenadurel "Roparz Hemon" (plasenn Verdun, Gwengamp) adalek 3 eur goude kreisteiz. Kaset e vo ar Fest-Deiz da benn gant :

- ar ganerien Marsel Gwilhous/Mañ-Soaz Lestig
- skolidi M.Gwilhous Gildas ar Bris / Nikolaz Coutois
- ar sonerien Stefan Pampanay / René Lachater, Ar Vreudeur Ar Bras.

Kafe, Krampouezh hag evajoù.

Fest-noz

Kuzul Skoazell Diwan

21/3/92. E Kawan gant Ar re yaouank, Daouarn, Ar breudeur Morvan

**NA ZISOÑJIT
KET !**

**Manifestadeg
SAB d'ar Sadorn
28 a viz Kerzu
e Kemper**

Staj

Eil staj Gwenedeg a vo etre ar 26 hag an 29 a viz Kerzu 91 er vro Pourlet. E C.E.S. Ar Gemene vo dalc'het ar staj-mañ

Savet hag aozet gant Kafe-Bara-Amonenn.

Titour a vo kavet e ti : **Henri ar Borgn Gwazh feuntan Vad 56160 Seglian Pellig : 97.28.02.43. (600 lur ar staj)**



Diskouezadeg

"Breizh da vare an Duked"

Ar Falz 44 a gemenn d'an holl o devo tu da heuliañ ur gaozeadenn gant Yann KERHERVE deus skol-veur Brest : "DUK BREIZH, ur roue en e Zugelezh"
D'an 6 a viz Kerzu da 18e30 (10 lur) hag un displegadur divyezhek (Brezhoneg ha Galleg) d'an 13 a viz Kerzu da 18e30 gant Solenn PIRIOU *bet animatourez an diskouezadeg e Daoulaz e-pad an Hañv.* (15 lur kenpeadur)
Mirdi DOBRÉ **straed Voltaire 9 a viz Du 1991 - 9 a viz C'hwevrer 1992 e NAONED**

TAOLENN

Lizhiri	2
Yougoslavia	3-4
Euskadi	5
Katalonia	5
Emvod Madrid	6
Japon	7
Kuzul Sevenadurel	8
Skinwel	9
Ar c'helenn noz	10
Stourm UGB	11
I.U.F.M.	12
Kendiviz e Brest	13
RBI - RBO	13
Etrekeltiegezh	14 - 15 - 16
Preder	17
Taol-pluenn	18 - 19
Brezel Bro-Liberia	20
Bemdez doue	21
Oaled Abherve	22
Dudi	23
Kemennadennoù	24

Maketenn gant J.M. Roynard ha Len Louarn.

Skoazell difaziañ : Olier ar Mogn.

Pennadoù gant : Joel Donnart, H.B. A.P., M.K., V. Auffret, Y.V. Thorel, T. Louarn, AVC, Hegareg, Y. Leskildri, Herve Kerrain, T. Kalvez, Geeta Camus, Fulup Kloareg, A.H., M.V., Alan Heusaff, Riwanon Kervella, M.D., J.B., Yann ar Rouz, Paol ar Meur, Yann Talbot, Gireg Konan, Pol Yvon, Noel Laine, Olier ar Mogn.

Luc'hskeudennoù gant : O.F., VSD, Lena Louarn, Le Monde Diplomatique, Noel Laine.

Tresadennoù gant : Malo Louarn, F.V.

Renerez Bremañ : Lena Louarn

SKRIVIT E-BARZH BREMAÑ

Kasit ho pennadoù, tresadennoù, kartennoù, luc'hskeudennoù (ezhomm a zo !), a-raok ar 1af a viz genver 1992. Pladennigoù pe fax 99 63 55 15.

**BLOAVEZH MAT DEOC'H
HOLL !**